





LOUARNIG

Niv. 16



Ar vaot



Marc'had ar Fantasti



Ar Piramidennou

12/20/01

An hoc'hed-gwenaennek

Kenderv Afrika eo d'an hoc'h-gouez a vev en Europa. E savanennoù Mozambik, Senegal, Etiopia ha Somalia a vezont kavet ivez.

Divalav !

Lavaret e vez diwar e benn n'eo ket brav abalamour d'e benn dibar daou vos dezhañ war an daou du hag evel div wenaenn dindan e zaoulagad. Pevar stilhon en deus o tont eus e c'heol. An daou zo en e javed traoñ a zeu da vezañ armoù spontus ha lemm dre forzh uzañ. 75 sm uhelder eo an hoc'h-gwenaennek, war-bouez nebeut, ha gallout a ra pouezañ betek 140 kg.



Debriñ ha bezañ debret

Ober a ra an hoc'hed-gwenaennek evel o c'hendirvi an hoc'hed-gouez : turiañ a reont an douar gant o moj da glask torzhelloù. Geot a zebront ivez, ar re wellañ a zibabont avat. Evit peuriñ en em lakaont war bennoù o daoulin d'o moj da vezañ tostoc'h d'an douar. Degouezhout a ra ganto bezañ debret ivez. Plijout a ra kig an hoc'hed-gwenaennek gant al leoned hag al louparded. D'em ziwall e klaskont kavout un douarenn dilezet ha dont a reont tre enni dre o fenn a-dreñv. Evel-se e c'hellont em ziwall gant o dent lemm evel filc'hier.

Ar familh

Tri pe bevar loenig war un dro a vez ganet gant ar barez. Bronnet ha gwarezet e vezont ganti. Gallout a ra dont da vezañ taer-kenañ mar sant e venner ober droug d'unan eus he loenedigoù. Ne wel ket mat an hoc'h-gwenaennek met klevout mat a reont. Bevañ a ra ar bared e-ser o familh nemet pa'z int deuet kozh hag ez eo gwell an digenvez dezho. Dre vras e vez ur par hag ur barez mui daou pe dri zorad en ur familh.

Testennoù ha tresadennoù gant Fred Lavail

